

DISPUT

COMPOSET A NEVEZ

ETRE

UL LEONARD HAC UR C'HERNEVOT.



SELAOUTI hac e cléfot , hac e cléfot cana
Un Disput so compozet a nevez er blos-mâ ,
Zo grêt gant ur C'hernevot ha gant ul Leonard ,
Ebars santier Tregueris o fumi ur c'horniad .

Nac er bloavez mil eiz cant ouspen seis ha trêgont ,
Eo bet savet an disput un nebeut divergont ;
Pepini a bretante difen caus e gontre :
Deut d'o c'hlevet o tisput an eil ouz eguale .

Ar C'hernevot.

Ar C'hernevot a c'houlen diouz ar pot a Leon :
Lavar din pez pansion a c'heus en da ganton ;
Te na c'heus qet a grampoez na galetez ive :
Me , va mignon , em beves an eil hac eguale .

Al Leonard.

Tao din demeus da grampoez , da c'haletez ive ,
Ne c'houlennan' nep fêçon an eil nac eguale :
Ro din un tam qig eugen hac un tamic qig moc'h
Da zebri gant fars güiniz , a zo delicatoù .

Ar C'hernevot.

Tao dîn divar ben ar c'hig, se n'eo qet un dra vad;
Parlant dîn demeus ar yod a gavân delicat :
Ro dîn un tam yod silet hac ur banne lèz tro ,
Me lôzo ar c'hig eugen gant an neb a garo.

Al Leonard.

Trahissa res , va mignon , bremâñ da santimant ;
Evit paea da fermou e ranqes caout arc'hant ;
En ezom deus a arc'hant e teuez d'o guerza ,
Ha ni , entrezomp , Leonis , a yoar dont d'o laza.

Ar C'hernevot.

Credi a rân , va mignon , nac e mout da farçal ;
Peneverde ma teuez em briò da glasq segal ,
E viges bet perisset , rac ne poa qet a hed ;
E blaveziou ar guernez , ni n'eus da recouret.

Al Leonard.

Ah ! ah ! eme'l Leonard , mad ec'h eus grêt toulla ;
Dont a vouie Qernevis e Leon da glasq bara .
Peneverde Leonis , dre ma zint oll tud vrao
O devijo bet Qernevis assur mad var o fao.

Ar C'hernevot.

Un tamic out effrontet , Leonard , bragou-bras ;
Ma ve grêt dide prouvi , e vez nec'het , siouas !
Lavaret ve Qernevis en da vrô o clasq boued ;
Ma ve grêt dit er zouten , meus aon na vez nec'het.

Al Leonard.

Hac e ranqen caout testou , memes deus da gontre ,
Hac e tefote cant dîn a so c'hoas en boe ,
Pere so bet soulaget ganemp-ni en hor briò ,
Hac a drugare Doue n'en dint qet oll maro .

Ar C'hernevot.

Credi a rân , va mignon , na c'heus sur tam rêsou ,
Qerse gafe Qernevis rancout mont e Leon ,'
Goude beza bet maguet a grampoez . galetez ,
Rancout monet e Leon da zebri patates.

Al Leonard.

Poan a res din em c'halon , o clêvet da gomzou ;
Me meus guelet Qernevis na pa vijent em brô .
O sailla gaet ar goachen goude sila ar yod
Gant ar c'hol ha patates , pa ellent , vel tud sot.

Ar C'hernevot.

Evit na col na panes na zeus qet em c'hontre ,
Mes beza em eus irvin ha patates ive ;
Traou int an excellanta evit ober souben ,
Laqat assambles ganto un nebeudic trinchen.

Al Leonard.

Scuiza a rez ac'hanòn , poan a rez din em pen
Gant da irvin , patates , hac ive da drachien :
Ar seurt-se a vez roet em brô d'ar châtal mud ;
Noppas da oza souben da bresanti d'an dud.

Ar C'hernevot.

Hansav din da legumach evit ober souben ,
Pe rez fae var irvin , patates ha trinchen ;
Rac evit ebars em brô ne zeus qen nemeto :
Noblanç ha paysantet , oll a zreb anezo.

Al Leonard.

Al lugumach em brô-me zo pour ha carotes ,
Oignon , col-guen , col milan , ouspen hor bez rabez ;
Istr , fao hor bez ive , col-fleur hac articho :
Cetu eno'l lugumach a implijer em brô .

Ar C'hernevot.

Consanti rân qementse na ganez , va mignon ;
Mes n'oar qet quer caer güisquet en escopi Leon
Evel ma zeo Qernevis gant o chupennou gloan
Hac o chupenuou mezer a vez ganto dindan.

Al Leonard.

Tao din , eme'l Leonard , gant ta chupennou gloan
Ha da chupennou mezer a vez ganez dindan.
Da vrageyer discaret ha da c'houricou ler :
Ni entrezomp Leonis a zong oll en mezer.

Ar C'hernevot.

Gûir mad e zeo qementse ganez-te , va mignon :
Mezer caer zo en Leon , mes grêt int difêçon ;
Ispicial ar goazet a gavân divalo ,
Rac calz ané zo cazi collet en o bragou.

Al Leonard.

Nac ar botret e Qerne o deus roqedennou
A so grêt evel sier da zougouen sac'hadoù ;
O bragueyer zo formet a ziou pe deir rideñ ,
O frennestou zo goal vrás da chom hep stalafen.

Ar C'hernevot.

Nac ar merc'het a Leon o deus coefeyer bras ,
Na pa vezont-i fachet e vez cruel o faç ;
Mes ar merc'het en Qerne o deus coefeyer bêr
Tout int laouen a visach , tout o c'haver ceder.

Al Leonard.

Tao din a verc'het Qerne gant o c'hoefeyer ber
A zo endro d'o bisach eguis un torchouer ;
Lostou o deus o c'hernou , eguis ar zaout em brô ,
Vit en em zigueliena e servichont dezo.

Ar C'hernevot.

Ne allân mui contesti , cedi a rân ganez ;
Ne qet possUBL resista eneb ar virionez.
Me a baeo boutaillad eus a greis va c'halon
Evit en em unani ganez , pot a Leon.


Al Leonard.

Cetu ni camaradet , ar C'hernevot ha me ,
Ne vezo den incredul demeus a guementse.
Un dra zo bet prouvet dirac calz eus a dud ,
Ar rezon-mâ a finis etrezo an Disput.

Al Leonard hac ar C'hernevot.

Ar son-mâ so compost gant ur Breiziad farcer ,
A hanavez tud Qerne , re Leon ha Treguer ;
Oll int lapinet subtil , mignonet a fêçon ,
Hac en ped amzer oll dign eus an titr a Vretou .

Hac en peoc'h hac en brezel o deus ar santimant
Eus a botret courajus , dudius ha vaillant ,
Ha mar be ret dê un deiz , nens fors en pez tachen ,
E vo cavet adare *Celtiget tor-e-ben.*



AR C'HEMENER.

Var ton : *Calz a amzer ameus collet.*

EUR C'hemener ne deo qet den ,
Fardi bidao , oao , oao , oao , oao ;
Eur C'hemener ne deo qet den ,
Neo nemet eur C'hemener hepqen.

Ne dle qet beza entêret ,
Fardi bidao , oao , oao , oao , oao ;
Ne dle qet beza entêret
Nac en ilis nac er vêret.

Hoguen e corn ur soulet qerc'h ,
Fardi bidao , oao , oao , oao , oao ;
Hoguen e corn ur soulet qerc'h ,
Oll chass ar baros var e lerc'h .

Ha peb a gaz ha peb a gui ,
Fardi bidao , oao , oao , aoa , oao ;
Ha peb a gaz ha peb a gui
Peb a lunedou var o fri .

Ha peb a fleur en o guinaou ,
Fardi bidao , oao , oao , oao , oao ;
Ha peb a fleur en o guinaou
Da gana *Requiem* da vuntrer al laou .

Pa ha'r C'hemener d'an dançou ,
Fardi bidao , oao , oao , oao , oao ;
Pa ha'r C'hemener d'an dançou ,
E carg e sac'h a vesqennou .

Evit ma laro ar merc'het coant ,
Fardi bidao , oao , oao , oao , oao ;
Evit ma laro ar merc'het coant ;
Ar C'hemener en deus arc'hant .

Pa ha'r C'hemener da e'hriat ,
Fardi bidao , oao , oao , oao , oao ;
Pa ha'r C'hemener da c'hriat ,
Ne ra nemet cana ha c'houitellat .

Nemet cana , cravat e ben ,
Fardi bidao , oao , oao , oao , oao ;
Nemet cana , cravat e ben ,
Ha muntra al laou hac ar c'hoen .

CHANSON

VAR SUJET AL LABOURERIEN DOUAR.

SELAOUIT oll, hac e cléfot eur guentel
A zo grêt a nevez var buez al Labourer;
Un etat a zo poannius, n'o deus qet calz a repos,
Neb e gra gant paciantet a c'honit ar Barados.

Eul Labourer en em expos d'an amzer,
Qercoulz d'ar yenien evel pa vez an domder;
Pa vezerc'h, scorn, caserc'h, grizill, curen, glao hacavel,
Baleit, hac qefot ato en e barq al Labourer.

Eul Labourer zo habillet e lien.
Ne ve qet brao bemdez evel ma ve ar vourc'hizien;
E habit zo struillennec, gant an douar labeet,
Calz a dud a renq e gaout, hac a granch ous e velet.

Differanç a zo etre cundu ar hourc'hizien
Hac an hini a ra lod demeus al labourerien :
Ar re-ze o deus qig ha pesket, bara guen, sooben vad bepret,
Hac eul Labourer, tamou yot, bara sec'h ha dour bervet.

Eul Labourer, baleet elec'h ma caro
A vez o qaquetet, calz a dud en disprizo;
Gouscoudeqement zo er bed, mar queront dont da sònja,
Eo divar goust al Labourer e ma ar bed oll e veva.

D'ar c'henta poent, e ranço eul Labourer
Paea taill d'ar roue bep bloas un teir pe peder.
D'an eil pa renqo paea e vestr, ma na vez prestearc'hant,
E vez o foar var e zanyes : homàn eo an nec'hamant.

D'an drede, e renq paea an deog d'ar person,
Evel ma zeo ar c'hustum, qementse a zo rezou,
Ha rei o c'hest d'ar vêleyen, an aluzen d'ar beorien ;
Hac evit na fazint qet, ar güir d'o servicherien.

D'ar bêvare, pa zemeer ar rugale,
E renquer o argouli, an danvez a izel neuze ;
Ha mar be rust ar mibien-caer, antronos goude eurevji,
Ma na ve prest an argoulou, er pillint evel bleizi.

D'ar bempet poent, mar sonch dont da brocedi ,
E renq caout eur yalc'had vad a arc'hant da zistribui :
Neus nac avocat na procuror, gressier, huissier na serjant
A rae an distera toi pluen evitan anes caout arc'hant.

D'ar chouec'hvet poent, e renqo laqat evez
Da zioual eus an tan da gregui en e zanves ;
Ennes a zo un element pa ve eur vech alumet,
A laqa calz da vont d'ar bas, ha memes da glasq o boued.

Ar seizvet eo al laeron gant o oll ardou ,
A binç eul Labourer hac a fouill e c'hoodellou ;
Ha pa ell attrap ar yalc'h, netra gantian na lezer ;
Cetu penos goude e oll boan e za madou al Labourer.

Eul Labourer c'hoas a vezoo caqetet ,
Hac e zanves o vont, n'en deus guer da lavaret.
Endra ma e mli o conta e arc'hant, mignon a c'hoarze dezàn .
Ma c'hallent e guignat e raent, hac ober goab anezan .

Ar chanson-mâ a ganer etrezoc'h, Bretonet ,
Var un êr excellant a nevez eo composet .
Rac-se ta , me ho suppli da brena peb a gopi ,
Evit e lenn ha passeal ho chagrin ha melconi .

FIN.

É Montroulez, eas a l'imprimerie Léonard.

